

Katalonia : brezel ar c'heleier

Alies e vez lakaet er mediaoù e renk ur pempvet galloud politikel. E darvoudoù Katalonia eo anat o fouez evit levezoniñ spered ar geodedourien, pe war un tu, pe war an tu all e vefe.



Pep kostezenn he deus he c'helaouennoù, armoù en ur brezel mediatek garv.

george Orwell, bet o stourm e brezel Spagn, en doa bet tro da zisklêriañ galloud ar c'hazetennoù hag ar mediaoù dre vras. Er maremañ e c'heller arvestiñ ouzh o nerzh e Spagn, e-sigur ar stourm etre difennourien Spagn hag an dizalc'hourien gatalan.

➔ DIV GOSTEZENN ENEBET-KRENN

Splann a-walc'h eo eus peseurt tu emañ pep media. Eus tu difennourien unaniezh Spagn e kaver an darn vrasañ anezho, moarvat : ar strollad Vocento, perc'henn war ar gazetenn roueelour ABC hag un toullad kazetennoù lec'hel (en Euskadi, Kantabria, La Rioja...), ar gazetenn virour ha broadelour spagnol *La Razón*, ar gazetenn virour *El Mundo*, ar strollad mediaoù Telecinco (perc'hennet gant Silvio Berlusconi)... ha betek ar gazetenn araokour *El País*, goude ma n'eo ket ken taer ar pennadoù embannet ganti. En tu-se e vefe da renkañ ivez ar chadenn skinwel publik kentañ, TVE1, feal-tre ouzh ar gouarnamant abaoe m'eo bet trec'h Rajoy war Zapatero.

Eus an tu all e kaver a bep seurt mediaoù ivez : ar chadenn skinwel katalan TV3, ar chadenn euskarat EITB, ha dreist-holl lec'hiennoù Internet evel *El Nacional*, *Vilaweb*... Da neb zo o chom e Hanternoz Spagn, n'eus koulz lavaret ken nemet prenañ ar c'hazetennoù euskarat dizalc'h

da ober evit klask bezañ kelaouet mat : *Deia*, tost d'ar Strollad Broadelour Euskarat, pe *Gara*, tost d'an tu-kleiz pellañ euskarat.

➔ GEVIER A BEP TU

A bep tu e klever hag e lenner gevier forzh pegement, ha n'eo ket al lennerien a zo o chom er Stad c'hall a vo souezhet, rak ar c'heleier skignet eno n'emaint ket gwall bell diouzh ar re a gaver e Spagn.

An dizalc'hourien n'int ket direbech kennebeut, anat deoc'h. Sur a-walc'h ez eont re bell ganti a-wechoù : skignet o deus skeudennoù eus tud bet gwallgaset gant poliserien e-kerzh ar vouezhiadeg, hag a oa skeudennoù koshoc'h evit gwir. Prezidant Katalonia, Carles Puigdemont, n'eo ket sklaer e emzalc'h ivez, peogwir en doa mouezhiet a-enep ar vouezhiadeg evit dizalc'h Kurdistan. En ur c'houlz all e oa bet berzet mouezhiadegoù keodedel gant gouarnamant Katalonia ivez, hag e oa bet kemeret ar boestoù-mouezhiañ gant polis Katalonia dre heg...

➔ MOUEZH AR GOUARNAMANT

Trec'h eo ar propaganda eus an tu all, avat. Ar pezh a glever da gentañ eo e vefe ar vouezhiadeg a-enep al lezenn. Adlavaret e vez a-hed an devezh gant an holl vedioù, komzet e vez eus ar vouezhiadeg enep-lezenn... Ur wech tremenet an darvoud ez eus bet meneget ur "voue-

zhiadeg c'hwitet". Lod all, evel Mariano Rajoy, a zo aet betek asuriñ ne oa bet mouezhiadeg ebet, nemet "ur farsadenn."

Taeroc'h e c'hell ar pennadoù bezañ ivez. Diskouezet eo bet poliserien Katalonia evel "treitourien", dre m'o defe bet diegi da enebiñ ouzh ar vouezhiadeg. Gwask zo bet lakaet meur a wech war bolitikerien Katalonia, ha lavaret ez eus bet e c'hellfe Puigdemont echuiñ evel Lluís Companys, ur prezidant katalan all hag en doa disklêriet Katalonia dizalc'h er bloavezhioù 1930, bet toullbac'het goude-se¹... ha fuzuilhet un tamm diwezhatoc'h. "Faskourien" e vefe an dizalc'hourien c'hoazh, pe, er c'hontrol, komunourien ha harperien renad Venezuela (alies-tre e vez kaoz eus ar vro-se er mediaoù spagnol).

Er c'heleier ekonomikel e veneger Katalonia c'hoazh, anat deoc'h. Prientet e vefe bet ur strategiezh gant embregerezhioù meur evit tennañ o sez eus ar vro dindan daou zevezh (ar pezh a zo c'hoarvezet gant meur a embregerezh evit gwir) [s.o. p. 10-11]. Dont a rafe Katalonia da vezañ ur vro eus an Trede Bed, skarzhet e vefe diouzh Unaniezh Europa ha ne vefe ket aotreet da ober gant an euro... Ha ne davo ket ar propaganda c'hoazh, am eus aon, pa lenner kemend-all e Frañs, neketa ?

SaG

1. Repu en doa kavet Lluys Company e Breizh, er Baol. Serret e oa bet gant ar Gestapo e 1940, diskuliet gant ar polis gall.